

# FRAJILITÉ AN DUD YAOUANC

Var eun ton rigolo



Ni boa eur hoguic yaouanc oa duman guenemp-ni  
Oa comanset da gana, mes breman na ra mui  
Eun nosvez goude e goan, o tont eur sonj ne ben  
Me a renk mont en nos man, var digare pourmen.

Me renk ober eur pale, eun droyad var ar mez  
Da glask e merh Perina, digant a intanvez  
Pe guir on havet coguik, gand oll dud ar vroma  
Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj  
Vo rei din caouet parrez, da gomans ma menaj  
Perin merh an intanvez, hounez a zo dam grad  
Kannerez a denserez, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intanvez, setu me deut exprez  
Da glask o merck Perina, da hanter tieguez  
Rac keit a me vemp yaouanc, or bo contantamant  
A plujadur a semples, ep chagrin na tourman.

Ma merck me zo abredic eur blavez hoaz  
Mar de contant ar buguel, me na renket a gaz  
Kousket eo eue guele, er pen dan traou a ti  
Monet a ran de havet da houlén diganti.

Arsa ma merh emezi, na din me levered  
A houi zo contant paouric, da gavet eur bried  
Berroh kafet an amzer breman epad an anv  
A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv

O ya va mam emezi, certain me zo contant  
Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouanc  
Mar dai caner a dansser, ac eur pot delicat  
Neuze a meus esperans, d'ober tieguez mad.

Neuze ar pot yaouanc man, a zo joans a ye  
Ac a zistroas dar gaer, hed an hent neur gane  
Penos eta yan goguic, te zo bet o vale  
Eun tam mout divezit, o hanons domp an de.

Neuze zistroas ouzin, gan eun air da hoarzin  
Mar de guir on me koguic, houi zo eur louarn fin  
Houi pefe ar vadelez, da vont breman ractal  
Da anons ma dimezi, betec ar presbital

Ar hoars var ma muzellou, pa non ket vit miret  
Ya va mignon emezan, me rei ze na reket  
Monet a ran evidoh, betec ar presbital  
Rac merh an intavez, evidoh, ne ket fal.

Bonjour da autrou person, me a zo deut gant prez  
Da hout a houi zimefe, eur hok ac eur bolez

Pere o deus dezir braz, da vea unisset  
Eun tamic a zo deja, o deus enem choaset.

Neuze a respontas din ive neur vous hoarzin  
Deus amans ebars er zal, kemer eur bane guin  
Troët ezout bepred, eun tamic de keyver  
A te heus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Eskusit nautrou person, mar meus drouc parlanter  
Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet  
A re a barlantan doh, a zo daou zen yaouanc  
A zezir be unisset velt diou galon gontant.

A re a barlantan deoh zo mal o fumelen  
A zezir bea staguët, gant ar memez chaden  
Unan ane triveh vla, an hani all pemzec  
Zo pel zo braz en hirvont, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont an illis  
A me o intorrojo, var dern a hatekis  
Pa oa goulet digonte, o na ouient netra  
Demeus ar zacramenchou, a re brinsipalla

Filet dar guer bugale, evit eur bloa pe daou  
Da hortoz ma po desket, dern ar zacramenchou  
Neuze zavas e ziu skoa, me a gred a zonje  
Eun druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeont d'ar guer, o daou eneur ouela  
Ret a vo demp emezo, donet da studia  
Ret a vo demp studia, couls an de ac en noz  
Mar ouefomp ket re neve, ni zeskoa re goz.

Tri pe bevar miz goude, a ia an intanvez  
Da gaout an autrou person, da lar dan tol evez  
Rag va merch zo languissant, eun tami zo déjà.  
Seul vui avans e hlenvet, ya bepred ar vella.

Setu an autrou person, d'ezhi neus lavaret  
Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet  
Aoui a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person  
A oar nem gonvertissa, eb mont dar mission.

Ar memez ira ezint bet, dimed ac eureujet.  
Gras da vaëa euruz, këit a vont var ar bed  
Bonheur zizeromp da keit a vont er bed ma  
A goude pa vont maro, er gloar da jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC, Yves.

# AR PILLAOUER

Ton anavezet

Va zad en deus va dimezet  
Da ur flierius pillaoouer (*bis*).  
E Lokeffret e zeo ganet  
E comanann Toulalaer !

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*,  
Gant he stoub hag he billou.

Tri devez goude va euret  
Enn ur gav foar Landerne (*bis*)  
Ha va lapous prim difunet,  
Ha zav er mez deus he vele.

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*,  
Gant he stoub hag he billou.

Draila ra eun anter Pater,  
Tana ra he gorn butun (*bis*),  
Tapout ra he grog pœzer,  
Evr̄t mont var hent Sizun.

Fœi, Fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Gan-han n'ur gav camaradet  
Eun ur vont da billaoua (*bis*),  
Ho holl arc'hant eun deust fœtet,  
Ha tam pillou n'en d'he oa.

Fœi, Fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Pa oa eun anter noz sonet  
Enn Iliz vras ar Fouille (*bis*).  
Me oa un intanves'glac'haret  
Va unan bars emm guele,

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Mont hera d'ar velin paper  
Gant ur zac'hadik pillou. (*bis*)  
Kals buhanoc'h eget ur ler,  
Rak prezet eo ann dellou

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Na pas zistro d'ar gommanant,  
Raktal ho zav un tam croz (*bis*)  
E pelec'h he man da arc'hant  
Me gred he mehinn e dagov.

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Pa za Ianik d'ar pardonioù,  
Bepred ha ve mezo dall (*bis*)  
Prest he oa da goll he vragou.  
E Lokeffret e deiz all.

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Pa zeuio ar c'hiz er vro-ma  
Da derri ann dimeziou (*bis*),  
Me ha iello enn ur gana,  
Pell deus potret ar pillou.

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Pa zeui karigel ann ankou,  
D'ober he dro er vro-man (*bis*)  
Me ha guerso var he roudjou  
Hag er pedo d'ar zamman.

Fœi, fœi, var va zamik aotrou (*bis*)  
Gant he stoub hag he billou.

Ha p'ann d'ho ann ankou boutet  
Toul ar flierius pillaoouer (*bis*)  
Me ha gwerso d'en lavaret  
Da gomanann Toulalaer.

Maro eo va zamik aotrou (*bis*)  
Var he stoub hag he billou.

Pa vo gret ann interamant,  
Gant ar paour kez pillaoouer (*bis*)  
He vo kavet ialc'h arc'hant.  
He zac'h pillou, he grog pœzer.

Maro eo va zamik aotrou (*bis*)  
Var he stoub hag he billou.

Red-vo-coms d'ann Aotrou Person  
Deus ar paourkez pillaoouer (*bis*),  
Ma vo canet ar Liberon.  
Hag ouспен-ze lip he rer !

Maro eo va zamik aotrou (*bis*)  
Var he stoub hag he billou !

FIN

Propriété de l'Editeur.